

# DISPUT

ETRE


SIMON AR GONTEL GAM

HA

POL AR PRI,

VAR SUJET AR BUTUN.

*DEDIET da guement Fri-Butun, Fumer  
ha Fumerezet, Chiqer ha Chiqerezet  
a zo e Breiz-Izel.*



E MONTROULEZ,

E ty LÉDAN, Imprimer - Librer.

DECEMBER

BRIDGE AND GATEWAY

BY

ROBERT W. BROWN

AND STREET AND BUILDING

DEPARTMENT OF THE DISTRICT OF COLUMBIA  
IN CONNECTION WITH THE  
RECONSTRUCTION OF THE CITY



H. MONTGOMERY

E. O. HAZEN, DISTRICT ENGINEER



# DISPUT

ETRE

SIMON AR-GONTEL GAM HA POL AR PRI,

VAR SUJET AR BUTUN.

---

SIMON.

**D**EIS-MAT dit, *Pol ar Pri*, te è va mignon qer;  
Eur guell vrud vras a zo ac'hanout er c'hattier.  
Clêvet e meus lavaret gant un den eus va zi,  
E voas bet o touguen peder fals-testeni,  
Hac evit recompañç eus eur c'hrim qen effioyabl,  
Ec'h eus bet un onz Butun : te zo eur miserabl.  
Ma na gueres divoal, ebars fin ar zizuu  
Ec'h ervo ganet sur avoalc'h goal fortun;  
Crouguet e vi, certen, ma na gueres divoal,  
Douguen fals-testeni a zo eur vicher fall.

P O L.

Ha goas a meus-me grêt evit eul loubardun  
 En em roas d'an diaoul evit cavet Butun,  
 Hac a voa en ifern epad mis guengolo  
 O visqa an diaoulou hac o torcha o boutou?

S I M O N.

Onnes zo ur fablen ha ne dê qet guirion :  
 N'en em ro den d'an diaoul eus a griz e galon,  
 D'an drouc-speret infam evit cavet netra :  
 Ober goab a fell dit, mes dit ê ar goassa.

P O L.

Ro peoc'h, mab-cagu diot. Ma ves-te butuner,  
 Herio em a yaou ha varc'hoas ar gueuer,  
 Ma vanqse dit Butun, a ben varc'hoas da nôs,  
 Te a guitafe crenn da lôd er barados.

S I M O N.

Va choqi bras a res, den excumunuguet.  
 Pa ven goassa Butuner a voe biscoas er bed,  
 Ne garfen qet sonjal er pez a leveres :  
 Guell ve ganen mervel ha caout mil dienes,  
 Ha quitat ar Butun evel un ampoeson,  
 Ma ve cos din da bec'hi hep nep guir na rêzon.

P O L.

Ia, te lavar se, pa n'en dout qet sujet  
 Na custum da vutuna e nep fêçon ebet.  
 Ezet ê dit cozeal, pa na zantes ar boan  
 En eus eur Butuner ep na Butun na tan.

S I M O N.

Me a gare gouzout penos na pe fêçon  
 E deut da guenta'r Butun er vro hac er c'hanton ;  
 Raç ul louzaouen ê zo cos da vil bec'het,  
 Ha casimant an oll a vutun dre ar bed.

P O L.

Ah! pebes graç a rōas Doue d'ar gristenien,  
 Pa zigassas ar Butun da zoulaji o angen !  
 Penevert ar Butun calz a golje o sqient :  
 Bet so Butunerien hac a zo bremâ Sent.

S I M O N.

Gaou a leres en faç, mab hena Lucifer :  
 Biscoas n'en deus bet Sant a vije Butuner ;  
 Ne guever qet er Scritur nac en histor ebet,  
 E ve ur seul Butuner hac a ve sovetet.  
 Nan, ne qet possubl ve er barados nicun  
 Hac en defe biscoas bet caret ar Butun.

P O L.

Penos, den maleürus! ha te alfe souten  
 Ne voa qet Sant Vaze mestr d'ar valtouterien,  
 Flac a voa en Judee o receo an tribut  
 Divar ar güin, ar Butun, bemde digant an dud?

S I M O N.

Guclet ran n'ouzout qet an histor-ze erfat.  
 Sant Vaze, p'oe galvet, a senchas prest a stad;  
 Rac ma vije chomet bepret da valtoutier,  
 E voa bet, hep douetanç, eur prinç da Lucifer.  
 Ha c'hois ne gomzer qet eno eus ar Butun,  
 Nemet m'er recevet dre an taillou commun.

P O L.

Ne qet ret mont qeit-se da glasq an historiou,  
 Evit gout piou a voa e digassas er vro.

Frances-daou a hano, Roue demeus a Franc,  
 Ilanvas da gannadur Nicot, den a brudanç,  
 Evit les Bastien, Roue ar Portugal,  
 Pini evit presant a ro deàn ractal  
 Butun scaferlati, anduill, cigalennou,  
 Botun poultr ha rapet, treujou, carotennou.  
 Nicot d'e Rouanez a roas ur brizen,  
 Ma commanças Mari strefia dre an daou ben.

Ne devoa tam yec'het aboe pell bras a voa ,  
 Ha ne rê eus netra an distera tam joa ;  
 Bea voa attaget gant an drouc-daoulagad.  
 Goude bea implijet meur a vedecin mat ,  
 Oll e lavarent dei e colje e guelet ;  
 Mes Doue a zigassas ar Butun beniguët ,  
 Evit e zoulaji hac e laqat pare ,  
 Ha calz istri-viti zo bet yac'h goude-ze.

### S I M O N .

Güir ê , pep seurt louzou zo crouet gant Doue ,  
 Hac hini ar Butun e deus eur vertus crên ;  
 En ur remet benac ec'h alfe servicha ,  
 Hac avision e c'heller certen e implija ,  
 Ha pa ve-li laqet da ober ongantchou ,  
 E mat ouz ascorn toret hac ouz ar goulion.

### P O L .

Ar Rouanes a Franç ne voa qet gouliet ,  
 Ne devoa bles ebet nac ive ascorn toret ;  
 Ne zante poan ebet nemet drouc-daoulagad ,  
 Ar Butun e yac'heas hac e laqas erfat.  
 Davantach , e zê mad eus a bep seurt clévet :  
 Chasseal , ra ar c'hatar ha scanvat ar speret ,  
 Hac ouz ar velconi e soulaj ive'n den  
 En defe ur boan benac , ur spont , pe un angen.

SIMON.

Va choqi bras a res, den excumunuguet,  
 Larat e teu ar Butun da scànvat ar speret;  
 Er c'hontrol ê : troublet ve dre nerz ar Butun,  
 Mellet ha barbouillet evel glo ha curun.

POL.

Brassoc'h gaou a leres, Doue d'am pardono;  
 N'eus qet a dud santel na savant bars er vro  
 Na implijont Batun pe en corn pe en fri.  
 Eus a oll dud ar bed, a bemp e vutun tri;  
 Ha c'hoas e laràn gaou ouspen eus an anter,  
 Rac ma ve grêt ur rol partout dre ar c'hartier,  
 Ar vèleyen da guenta a vutun oll cazi,  
 Ma ne laqont en corn e leqont en o fri,  
 Hac a zo tud santel savet en doctrin vat:  
 Ma vije-ta eur pec'het, e teujent d'er c'huitat.

SIMON.

Ar vèleyen a fazi qercouls hac ar re all;  
 Ne laràn qet vit se certain e zint tud fall,  
 Rac ar re-se zo tud far, habil ha moderet,  
 Qercoulz gant ar Butun evel gant traou ar bed,  
 Nonpas te na da sort so evel diaoulou,  
 Nemet ar c'horn a ve bepret en da e'hinou.



Da vreg, da vugale o vervel gant defot.  
 Eur vech, evit caout Butun e voerjont da ribot,  
 E rojout vit tri guennec, hac hi o coustout deg,  
 'Tri goef ha tri mouchouer hac un iviz da creg,  
 Ar pez a zo coz dei da rêi dit mil mallos,  
 Ha da c'honit an ifern elec'h ar barados;  
 Ha c'hoas te e maltretas gant troad eur gos rastel,  
 En defot na verze he bros hac he mantel.

## P O L.

Ia, hi a lar se; mes ennes zo eur gaon,  
 Ha brassoc'h eguet se e teu deus e guinou,  
 Rac pa ve e coler, e zê vel eur serpent,  
 Ilac e lar din mil injur, traou vil hac insolant.

## S I M O N.

Cômanç dre vea fur, den brao ha moderet,  
 Ha quita ar Butun evel un drouc-speret.  
 Da vreg zo coant ha fur, hac eur boanieres vat,  
 Mes te zo eur bourreo, un tirant, un ingrat,  
 A deu d'e maltreti pa vanq dit ar Butun,  
 Hac e lêzes anei ha da vugale da yun.

## P O L.

Penos quitat ar Butun, *Simon an Diboellet?*  
 Guell ve ganén mervel ha bea dibarfoueltret;

Rac o tont da vervel n'em be neuwet eur boan,  
 Hac o vea eb Butun n'on qet quit gant unan.

## S I M O N.

Brêman e credàn ferm ar pez a meus lennet  
 En eur fablen guechal, pa voan gant va dênvêd,  
 Penos voa ar Butun a voe coz da *Gain*  
 Da goea en disesper ha da ober goal fin;  
 Rac *Cain* voa ar c'henta a labouras an douar,  
 N'ont qet pe gant un tranch petramant gant ur bal.  
 P'en devoe labouret ha destumet al louzou,  
 Ha laquet gantàn oll ar re fall a verniou,  
 Evit dont d'o dêvi eno var an dachen,  
 Ha teuler al ludu en creiz hac en daou benn,  
 Louzaouen ar Butun en em gavas ive  
 Etoues al louzou all. *Cain* ne vouie doare,  
 Qen a zantas ar c'hoez aneàn o têvi,  
 Hac antren aneàn ar moguet en e fri;  
 Ma commanças strevya vel eun den arajet,  
 Ha da gonsideri petra voe ar sujet.  
 Qerqent hac én fouilla, ma cavas un tam had  
 Ne voa qet c'hoas dêvet, hac en hanvas *TABAC*.  
 Calz a dud a sonch dê *Tabac* a zo gallec,  
 Mes en em drompla a reont, rac certen n'en dê qet.  
*Tabac* zo eur guir lebre a sinifi bossen,  
 Pesti'anc, droug-ar c'hi, calz a draou all ouспен.

Da viana , *Cain* a voe ganti troublet ,  
 Pa antreas en e benn an nerz eus ar moguet.  
 Eun neubeut guole-se ec'h erruas *Abel* ,  
 Breur unig da *Gain* , eun den fur ha santel ,  
 A c'houlennas gantàn : — « Va breur, petra c'heus grêt,  
 « Ma zê da santimant ha da speret troublet ? »

« — E vin daonet, me *Cain*, tec'h pront dirac va faç,  
 « Pe me a palfoultro hac a tolo d'am chass. »

*Abel* voe qer spontet , ma coeas d'an douar ;  
*Cain* , evel eur c'hi clànvet gant ar gounnar ,  
 A zaillas var e vreur hac en lazas timat ;  
 A laqas an douar da ruzia gant ar goad.  
 Setu genta massacr voe biscoas aruet ,  
 Divarben ar Butun , louzaouen milliguet ,  
 C'hoas ne voa qet avoalc'h , rac *Cain* goude-se ,  
 Pa voe bet tamalet , gourdrouzet gant Doue ,  
 Pa velas pesort muntr ha crim en devoa grêt ,  
 A goeas en dizesper hac a zo bet daonet.  
 Oll diaoulou an ifern , pa voe daonet *Cain* ,  
 En em gavas gantàn pa voant en enteri.  
 Mar er c'hasjont gante var eur meue huel ,  
 Hac e laqjont e gorf da zec'ha en avel ,  
 Pa voe neuze sec'het ha crazet a fêçon ,  
 En e gargjont qerqent demeus a boultr canon ;  
 Hac e touez ar poultr-se e fourjont paqajou

Demeus an had Butun, ebars e oll vemprou.  
 Neuze e rejont eun toul ebars en e goste,  
 Da servichout da amors er c'horf milliguet-se;  
 Laqet an tan varneàn evel var ur c'hanon,  
 Ma foultrjont bibennat ebars en peb canton.  
 Ha neuze gant eur paqat a Vutun infernal,  
 Unan a yas en Spagu, un all en Portugal;  
 Unan ebars en Bro-Soz, un all en Itali,  
 En Allamagn, en Holland, er Suis hac en Turqi;  
 Mes al loden vrassa a voe stringet en Franç,  
 Surtout en Breiz-Izel, d'on daoni en avanç.  
 Tolet e voe ive ebars en Normandi,  
 Er Chin, en Tartari, er Pologn, Russi;  
 Anfin, stringet e voe dre bêvar c'horn ar bed;  
 Er fêçon-se ar Butun a so bet griennet  
 Dre an oll brovinçou, dre voyen Belzebut  
 Ha *Cain* milliguet, evit peur-gol an dud.

Ha te, evel *Cain*, a velàn a zo prest  
 Da goea en disesper ha da c'hoari da rest.

#### P O L.

Eur bassiantet vras a meus cus da glêvet;  
 Ma sentjen d'am humor m'em boa da barfoueltret;  
 Mes guelet a ràn sclêr n'en dout nemet un azen,  
 Ha te grêt da studi na ouzout qet ouспен.  
 Da argument zo fos, n'en dê qet fontet mad,

Particulieramant var ar guir a *Dabac*.

Te lar e zê hebre, me lar dit nen dê get :

Me a ya der souten dre'r pez a meus lennet.

Pa voa guechal ar bed abimet en antier  
 Gant an dour an diluch, certen e voa mizer ;  
 Noe a ras un arc'h dre ordrenanç Doue,  
 Evit en em gonsev, éu hac e vugale.  
 Pa voa bet er guis-se eur pennat var an dour,  
 E losqas ur vran du, darn a lavar ur scoul,  
 Evit gout ha hy gafje tam douar disolo,  
 Pe eur mene benac en un tu var an dro ;  
 Ar vran a eure goab a Noe ar barvec,  
 Hac a chommas da zibri qiq tud ha qiq loenet.  
 Mes Noe pa velas na deue get var e guis,  
 A losqas var e lerc'h eun eil guech ur goulm gris ;  
 Pehini a retournas, ar goulmic vinniguet,  
 Hac eur feuillen Butun ganti en creiz he bec.  
 Neuze en devoa joa ar barvec coz Noe,  
 Hac én ober ur sarmon eno d'e vugale,  
 Var sujet ar Butun ha rêson en devoa :  
 Milliguet vo an den a rai ar memes tra.  
 Neuze Noe ractal hac en henvel TABAC,  
 Nonpas en ies hebre, mes en ies syriac ;  
 Ha pa ve expliqet en langach brezonec,  
 E sinifi qêlou mad, boneur bras hep abec.  
 Neuze Noe a deuas da lavaret d'e vugale :

- » Ho pezit soign, emezàn, eus al louzaouen-ze ;  
 » Rac honnnes zo'l louzaouen ha ma oufe an oll,  
 » A ro calz a brofit, hac ampech ouz ar c'holl.  
 » Da guenta e zeo-mat vit en em gonsoli  
 » Ouz maliç ar grague, pa veont en furi.  
 » Laqit eur c'hornedat, sortiit prontamant  
 » Ermes demeus an ty evel rac ur serpent,  
 Ha larit en latin eur gueric mat benac :  
 » *Libera nos, Domine.* Hon delivrit, Otrou mat.  
*A fulguræ et tempestate.* Ha leverit goude-se :  
 » Dious ar foueltr hac an tempest, hon dilivrit,  
 « va Doue.  
 » Ha laqit eur c'hornedat var ho passiantet,  
 » Ha souden e sortio ar goler eus ho creg. »  
 Bremâ, *Simon*, en eal, ha te oufe contesti  
 Na disput ouzin-me, daoust dac'h oll studi ?

S I M O N.

Contesti rafen ouzit, ma ves den resonabl ;  
 Mes eun den daonet out, se zo incontestabl.

P O L.

Da fri en traon va c'hein, *Simon ar Gontel-Gam.*

S I M O N

Ha te yel gant an diaoul, *Pol ar Pri*, den infam.

P O L.

Mar car rêi din Butun, me servicho sincer.

S I M O N.

Mont avoalc'h ri gantàn ep Butun na diner.

P O L.

Laret a ràn dit c'hoas : nemet em bo Butun ;  
Ne meus aon rac an ifern, na memes ar gurun :  
Butun, Butun atao ! ep diner na çantim....

S I M O N.

Adieu fri capotet, collet c'heus va estim.

F I N.

511

[19]

1875

Hier est le dieu Butan, me servir de guide.

Butan.

Mont avale de la grotte de Butan au d'ouest.

Le mont avale de la grotte de Butan, au d'ouest.  
Le mont avale de la grotte de Butan, au d'ouest.  
Le mont avale de la grotte de Butan, au d'ouest.



Adieu

Le Mont avale de la grotte de Butan, au d'ouest.